




## M'HO PEUZ EUR PHONO...



...e kavoc'h pladennoù (disques) brezonek, a re yrao, e Kastel ag e leac'h all, en tiez ma vezit e c'hober ho prenadennou. An Aoutrou Georges SELLERS, eur muziker braz brudet e Pariz, a zo e vuzikat ganet tre ma kanan.

Setu aman ar pladennoù brezonek am beuz kanet da ziveza :  
**Son ar Pinard, Perak e choman paotr yaouank, War bordig an dour, Gwir Vretoned, An teodou fall, Ar plac'h diez da gontanti.**

Goulennit atao ar pladennoù Gramophone "**Mouez e vestr**". Arreze eo a re vella.



# KANAOUEN

an

# DAOU BRIED



Savet ganth ar barz kastellad  
**Francis MOAL**  
 «Alc'houeder Leon»




# KANAOUEN AN DAOU BRIED

Son nevez, war eun ton anavezet

Savet gant ar barz kastellad Francis MOAL, «Alc'houeder Leon»

I




'N'dervez vezont eureujet  
Oh, na kaera dervez  
Evit an daou bried.  
Unanet vit jamez  
Dirak n'aoter benniget,  
Ho daou ho deuz lavaret :  
« Ia, beteg heur ar maro,  
Bepred ni 'n'em garo. »

II

Breman, pa zomp unanet,  
Ni enem zikouro.  
A tre ma vezo iec'het  
Hom daou ni labouro,  
A pa vezor glac'haret  
'Vit kas kuit ar boan speret,  
Hom daou ni a lavaro :  
« Bepred ni 'n'em garo. »

III



A, ma c'herru eun dervez  
Bugale barz an ti,  
Pebez laouenedigez  
Vezo evidomp ni:  
Ni zesko d'hor bugale  
Anaout a karout Doue.  
Dezho, ive, ni gano :  
« Bepred ni 'n'em garo. »

IV

A p'erruo an dervez,  
'Rankomp enem gwitaat,  
Ni lavaro assemblez,  
Daelou en daoulagat :  
« Kenavo, er Baradoz  
Me vezo ouz da chortoz. »  
Da zant Per ni lavaro :  
« Bepred ni 'n'em garo. »

FRANCIS MOAL.